

# ITRON VARIA RUMENGOL

Guillou



1. Li - li ar - han - tet o de - liou, War ribl an dour 'zo er pra - jou,  
2. O Ru - men - gol, pell am - zer 'zo C'hwi eo bo - ked kaer - ra or bro;  
3. N'eus e - les - trenn e - béd er prad A daol - fe ke - ment a c'hwez vad;



1. Dou - e de - zo 'ro - as dil - lad A skuill er mê - ziou péb c'hwez vad.  
2. Péb ro - zenn go - ant, péb li - lienn A zo dis - liv en ho ki - chenn.  
3. E Le - on, Tre - ger ha Ker - ne, Gan - (n)eoc'h e kle - ver c'hwez an Neñv.



I - tron Va - ri - a Ru - men - gol Gwer - hez gal - lou - duz Re - med - Oll,



Roit deom hi - rio, en an' Dou - e, Ye - hed ar c'horv hag an e - ne.

1. Lili arhantet o deliou,  
War ribl an dour 'zo er prajou,  
Doue dezo 'roas dillad  
A skuill er mêziou péb c'hwez vad.

*Diskan :* **Itron Varia Rumengol  
Gwerhez gallouduz Remed-Oll,  
Roit deom hirio, en an' Doue,  
Yehed ar c'horv hag an ene.**

2. O Rumengol, pell amzer 'zo  
C'hwi eo boket kaerra or bro ;  
Péb rozenn goant, péb lilienn  
A zo disliv en ho kichenn.
3. N'eus elestrenn ebéd er prad  
A daolfe kement a c'hwez vad ;  
E Leon, Treger ha Kerne,  
Ganeoc'h e klever c'hwez an Neñv.

## NOTRE-DAME DE RUMENGOL

1. Lys au feuillage argenté,  
Qui poussez au bord de l'eau, dans le pré,  
Dieu vous a donné une parure  
Et votre parfum embaume la campagne.

R: Notre-Dame de Rumengol,  
Puissante Vierge de Tout-Remède,  
Accordez-nous aujourd'hui, au nom de Dieu,  
Santé de l'âme et du corps.

2. O Rumengol, depuis si longtemps  
Vous êtes le plus beau bouquet de notre pays ;  
La plus belle rose, le plus beau lys  
Sont bien pâles auprès de vous.

3. Aucun iris dans le pré  
Ne parfume comme vous ;  
En Léon, Trégor et Cornouaille,  
Vous êtes le parfum du ciel.